



CANTIC

VAR BUEZ SANT ISIDOR,

PATRON AL LABOURERIEN.

Var an ton ancien.

DRINET santel, prosternet dirazoc'h d'an daoulin,
Me ho ped da rei graçou d'ho servicher indign,
Da gomposi ur c'hantiç en gloar hac en enor
Da Batron al Labourer, ar Zant bras ISIDOR.

C'hoant ha desir bras ameus, gant ar c'hraç a Zoue,
Da ziscléry d'ar Vretoned an tenor e vue
Al leç'h ma voa bet ganet, e gontre hac e vro,
E oberiou excelant, ivez e vertuziou.

Mes, Majeste adorabl, Doue, Roue an Tròn,
Tranquilisit va speret, ha tomit va c'halon,
Ha roiñt din hoc'h assistanç ebars em antrepris,
N'ouffen qet bea goassa, ervez m'a meus avis.

Honont ar guér capital a Spagn, hanvet Madri ;
E devoe en avantach guechal da brodui
Ebars en o fobourziou ur rosen précieux ;
An Autrou Sant Isidor, mignon bras da Jesus.

Ar mestr evel ma clêvas an accusation,
A laras gant garantez : Isidor, va mignon,
Me ne meus qet ho caget da laeres an amzer ;
Rac-se bezit fideloc'h ur vech all d'ho tever.

Isidor a respontas gant un drêm graciôs :
En despit d'an oll valiç eus an dud anvids,
Me servicho da guenta Jesus, Mab da Vari ;
Eunnàn ema va fisianç, va support, va appui.

Un deiz e c'has Isidor d'e labour divezat,
E vestr hac e partia d'e visita timat :
Eruet tost d'ar mezoù, e velas daou æl guenn
O cundui an arer bars an creiz an dachen.

E vestr a laras neuze, sésisset gant eston :
Faus ê, evel a velàn, an accusation ;
Me voar dre experianç ê faus an oll glêmou
Zo grêt din a Isidor abeurs ar goal deodou.

Davantach c'hoas d'ar goude e vestr voe tourmantet
Dre an nerz eus an domder er parc gant ar sec'het ;
Mes Isidor en douar e c'harzou a blantas,
Ha eno, dre c'hraç Doue, ur feunteun a savas.

Unan eus a vugale e vestr qer a varvas,
Gant ur c'hlévet violant, hac en resuscitas :
Qer bras voa e garantez en andret ar beorien,
Ma multipli ar bara da rei an aluzen.

Un de pa yê d'ar vélin hac ur sac'hat ganta ;
Dre ur scoulat morfontus e lézas da scuilla
An anter eus e sac'hat da rei d'al lapousset,
En un audret en devoa en erc'h disoloet.

An dud pere a voa gantàn a commanç da c'hoarzin,
Da ober goab anezàn; mes Doue quent ar fin
A recompanç Isidor, a bê e garante,
Rac carguet voe e sac'had dezàn gant larguente.

Pa voe en oad avancet, vardro un trêgont vla,
E choasas evit pried Mari a Gabeza,
Ur grouadurez parfet hac a gare Doue,
Hac en deussàn servichet gant peb fidelite.

An ên a roas deze erfin ur c'houadur,
Carguet a avantachou a gostez an natur;
Mes ar maro diremed, dre ordrenanç Doue,
A greis ar fleur eus e oad en lamas dignante.

Goude deced o buguel, ar rest eus o bue
E conclujont assambles miret ar chastete;
Ar yun hac ar binijen, ar peoc'h, an orêson,
Voa nouritur o eue, plijadur o c'halon.

Goude beza cunduet pell-amzer assambles
Ur vuez ireprochabl ha leun a zanteles,
Pried santel Isidor a rentas he'ene .
Etre daouarn ar Verc'hes, ar Zent hac an Æle.

Ebars en ompinion a Zantes e varvas,
Doue en e fersonach a rê miracloù bras,
Hac ar bez e pehini voa e c'horf enterret,
A voe gant ar bobl Christen a bep tu enoret.

Ouz an disposition, ar sêson, an amzer,
Eus ar glo pe a sec'hor, en Spagn en e feder,
Hac e touguer en ezom er Processionou
Gant calz demeus a brofit bepret he religionou.

Ebars en dranslation eus e gorf precius,
Voe grêt un nombr infinit a fejou merveillus,
An oll gleyer o-unan da son a gommenças,
Da galz a dud afflijet ar ye'chet a roas.

Dre gontinuation e rê bemde choulou
En andret e vignonet nombr bras a vurzudou;
D'ar mud, dan dal, d'ar bouzar had'ar paour impotant,
Ouz e bedi gant fizianç, e roe soulajamant.

An drouc-speret a glasqas un nos precipita
En fionfond an abimou un den devot deza,
Abalamour ma veve bars en pec'het marvel,
Ha ma voa dre conseqant d'e Zoue infidel.

Ar Zant o aparissa a deu da chasseal
An diaoul trist ha confus d'e brisoniou teval,
Ha gant ur voes a zouçter a bedas e vignon
Da ober incessamment ur guir gôvessiou.

Ur famelen afflijet seiz vloas gant ar c'hlévet,
Isabel voa he hano, ha Tellez, lezhanvet,
O visita'r sepultur eus ar Zant glorius,
A recevas ar yec'het a drugare Jesus.

Sant Isidor o tonet den em aparissa
D'un esclao eus an Turqi en errol o veva,
En inspiras da renonç e grenn d'e falz lezen,
Ma teuas da ambrassi hini ar Gristenien.

Pêvar den clàn afflijet gant clénvet corporel,
Rentet en extremite en danger da vervel,
O touch hepqen al lien en devoa lienet
An Autrou Sant Isidor, o devoa ar yec'het.

Cessomp breman, va fluen, ha lezomp a goste
Ar rest eus e viraclou, rac calz zo aneze :
Ma ve ret deomp en antier donet d'o recita
Na vemp qet prest er vech-mâ da zont da finissa.

Nê qet eta hep rêson, nac hep bout meritet
E teuas ar pab Gregor, a hano pemzecvet,
Da laqat var cathalog ar zent all glorius,
An Autrou Sant Isidor, favori da Jesus.

Cetu echu an histor gaer demeus e vue;
Imitomp oll anezi gant fe ha carante :
Mar heuillomp e exemplou hac e vertuziou rar,
E vezimp oll evurus un de hep laqat mar.

Tosta amân, den impi, ha yen eus a galon,
Deus da scol Sant Isidor, disq ober orêson ;
Gra dre imitation bep nos ha bep mintin,
Da exerciç a Gristen humblamant d'an daoulin.

Tad superb ha colerus, touerien da Zoue,
Heuillit douçder Isidor hac e humilite ;
Pe seurt profit hoc'h eus-u diouz ho plaspêrou,
Nac oc'h enoriou monden, nac oc'h oll bombançou.

Un habitud criminel a so ebars er vro,
Da brofani alies ar Suliou, ar Gouëliou :
Isidor o implije da servicha Doue,
Oc'h exerci an euvrou demeus a biete.

C'houi, bugale dinatur en andret Mam ha Tad
Perac oc'h-u qen cruel, qen cri, ha qen ingrat
Isidor a voa docil bars en qever e re,
Ouz o zrêti gant enor, respet ha carante.

Ur buguel bian hanvet Mazeau an Hegarat;
Mab Ezuant, ha Fant Callec, eus a Enes-Briat,
Eu em vezas dre valeur en ur varazad dour,
En gouelen diveza, hep gallout caout sicour.

Pa voe entre e divrec'h gant e vam astennet,
Qement den e voa presant en crede decedet,
Mes Doue hac Isidor o deus bet imploret,
Hac o buguel en instant a so resuscitet.

Dre un destin maleurus, Fant ar Borgn, a Dreguer,
E deus laqet c'hoec'h buguel, allas! bars en lumier,
Hep beza bet ar boneur da receo badiziant,
Nonobstant e oll fatig, e foan hac e zonrmant.

Eu em gavet é brazes na divar ar seizvet,
D'an autrou Sant Isidor é bet en em voestlet,
Ha dre e brotection e qichen hor Jesus,
E deus bet ur guilioud hac a so evurus.

Guillarm Janvier, habitant eus a Pleuveur-Gotier,
Var arguele afflijet gant clénvet ha mizer,
O veza en angoni, gant an oll condaonet,
Pa voe goestlet d'ar Chapel en devoe ar yec'het.

Eur buguel a Peuverit, impotent er c'herset,
O visita Isidor a so bet goellaet ;
Diaguent ne remue nemet var e flac'hou,
Neuze e yas e-unan hac o lezas eno.

Eur buguel a Pleuvian, o chom bars en arvor,
Goelc'het gant dour vertuzus feunteun Sant Isidor,
Eléc'h ma voa diaguent notet ha daoubleguet,
Eu deus, dre c'hraç un Doue, recevet ar yec'het.

Un nombr bras a viraclou en deus c'hoas operet
Aboe ma zé er c'hanton gant ar bopl invoqet ;
Ma ve ret o raconti oll en particulier,
E teufet da ramplissa nombr bras eus a baper.

Poent bras é demp finissa hep avanç davantach
Arretomp amâ bremân, concluomp hon ouvrach
Mar leqeomp en pratiq ar pez on eus scrivet,
E vezimp er Barados un deiz oll curunet.

Supliomp a vir galon hon Tad Sant Isidor,
Da veza hon Avocad hac hor guir Protector,
D'hon presanti da Zoue en articl ar maro,
Ha da c'honit ar victor var an oll diaoulou.

Dirijomp oll hon moeziou d'en pedi assambles
Da apesi un Doue irritet qellies,
Da zivoal hon c'horf ato, da zivoal hon ene,
Ha da veva direproch ar rest eus hor bue.

Deut eta, oll Vretonet, deut oll a bep canton,
Deut da Zantes Helena da bedi hor Patron ;
Rentit dezân hoc'h homach, hoc'h henor, ho respect :
Mar en petit gant fianç e vezot sicouret.

Sant Isidor so ive en Ilis Plouigno,
Guir Batron ha guir Vignon Labourerien peb bro :
Deut d'en pedi, Bretonet, eus a greis ho calon,
Hac o pezo gant Doue e venediction.

FIN.

M'ho ped, abeurs Doue, oll bugale yaouanq,
D'ho tadou, d'ho mamou bezit oboissant;
Douguit enor dezo ha deut d'ho respecti,
Jesus ne vanqo qet dont d'ho recompansi.

FIN.



E Montroulez, e ty LÉDAN, ru ar Pave.